

Exemplou a Mod en Dimezelet !

(War don ar Pillouer)

I

Dirolet e ma chapelet kolet gani a hanter
Na non ken vit pidi Doue, na vit laret ma rozair
A pe na non ken vit pidi, meus zonjet ober traou all,
Ober eur chanson dar merhet ma kavong dober er bal.

II

Ar merhet yaouanck zo brema a blija de an dansou
Na pe gavanq potred yaouanck da rei tro do robenou
A pe gavanq ket a botred a hanq diou a diou en dro
Fouei fouei warnoh dimezelet re ver e o robeno.

III

O brema a zo en anzer sort neusket gouelet biskoas
Gouelet er merhet a dansal kazi vel ma ving a noas
Ar botret yaouanck zo brema vo ret dei bean goal fur
Pe nong kolet gant er merhet ze a laran a dra zur.

IV

Na weler ken gant a merhet en amser a zo a ren
Nemet kouer fal evit ar botret, a hober a zoleten
Livajou a deus brema evit a nem farda
Sonjal a ve ar botret kas pokat dar goanta.

V

A brema mainq oll a vanden kazi vel ma ving a noas
O vale alldro ar bourkou ag ive ar herriou bras
Eun dimezet hir e dillat zo koant a brao da welet
Mez a re a zo hanter noaz a gle bean reputet.

VI

Henez a zo eur mod neve a zo arru bars non bro
Deut dimeus a goste Paris, gant merhet ar houancho
Mar nek et deut deus Paris ma deut deus eur vro al
Ar mod-ze zo deut da vroma dimeus ar houanchou fal

VII

O diou-har a zo dizolo beta pennou o diou-lin
Eur vez e goelet a neze pe deusket eur lairou fin
A pe ving oar a veloou ve dud gante a houarzin
Car re ver e o robeniou da gouach penou o diou-lin

VIII

O bruchet a zo dizolo, o diou vreh a zo a noas
Poahet inq ol gant er chaleur a gant en domder vras
Chanchet a neus liou o hrohen vel zo tre de hag noz
Mez mar ginq mezus da welet neket Doue a zo koz

IX

A brema zo kals a neze ag a neus taped eur mod
Da von et beb zun da raza kazimant evel eur pot
Da vont da di ar perruker da lakat troha o blaiw
Eur vez e gouelet a neze pe zeuanq a hanné.

X

A brema mainq a vel eur yar diblumet
Gant Kals a ne a greda neus na hinvic na rochet
Kar brema gant en tondeuz mainq trohet tro var dro
Laket hanval deus ar botret ma dije bet moustajo.

XI

A neket a houalh en tondeuz da zonet do raza
Ar perruker gant e razour a zeu da finisa
En amser zo tremenet biskoas zobet klevet
Vije laket ar razour da douza ar merhet.

XII

Brema ar perrukener e goellet e vicher
Mar kav merhet da douza rei herhant a paper
A dimezelet zo brema zo koustus da zelhen
Eur loden vras dioute talanket o hrohen.

XIII

Netra na houlaing doher n'emet ober chervat
A cherrisa ar botret dont gante da nebat
Car o brassa plijadur zo brema ordinal
Pe glevainq ar piano a son d'ober er bal.

XIV

Mes hui tadou a mamou martreze a zo kos
Rei shouer fal do pugale kouls a de vel a nos
A brema e maing bemde a houlen traou neve
Mi gret a santo o yalh na veket pel dale.

XV

Lakat ret kals a herhant en traou kaer en tokou
Mes goude ma vonq dimezet kals lako o houefou
Kals goude ma vonq eurejet a dolo o robenou
Ag a lako a dantelez neuze d'ober liannou.

XVI

Kals a zeus da sonjal no amser dremenet
Mar ge aet gant en avel martreze e kolet
Kar neuze cals a vannou a vo bars en hirvout
Mes a amser dremenet verket vit in tapout.

XVII

Setu aze eur guentel vit ar merhet yaouanck
Pere zo heuil en deboch ag a dispigne o herhant
Kar ar merhet a za brema rinq bean guiske! mad
Car hotillon ag ar bragou tout a deus hoant do haed.

XVIII

A toulou en halhouevn da gomandi partout
A peno debet ar mêl Yan a lipo ar pot
Ober a reinq bombans chervat kondui a dal rond
A tamal hoas da Yan gaes ma ga ar stal da fond

XIX

Ze a zo bet nem gavet a amser dremenet
A brema halomp dioual a amser da zonet
Rag ze hui potret yaouanck zo a roulal merhet
Na laket ket o fiars bars en dimezelet.

XX

Na laket ket o fiars bars ar blaiou trohet
Kals a dud gant a reze a reze a zo bet dogannet
Brema da verhet er houefou mi ra ma melodi
Dreze hui potret yaouanck choazet beb hini.

J. KRAVIS, Maël-Pestivien.

Tous droits réservés.